

# GUERZ HELENA JEGADO,

Condaonet d'ar maro gant Assiso Raon, en mis querzu 1851,  
a dibennet er guer-ze an 21 a vis c'houevrer 1852, evit  
bezan ampoesonet d'an neubeutan seis a daou ugent a dud.

Var ton : *Potret Plouillo.*

Ol habitantet Breis-Izel tosteed da glevet contan  
Eur recit guir a spouronus a grimo an horruplan,  
Pere a zo bet cometet gant HELENA JEGADO,  
En pad tost da ugent blaves, o scuil dre ol ar maro.

O Done bras, ol-galloudus, crouer d'an env, d'an douar,  
Piou hallo dont da recitan hep simplin gant ar glac'har,  
Torfejo quen cri, quen poner, a crimo quen direglet,  
Ma na deurveet rein dezan un ners demeus o speret?

Tri ferson sacr eus un dreindet, gant guir fe a c'houlennan  
A jicour vad-ze a nerzus pehini vanq din breman,  
Evit gallout rein da gompren d'an ol dud en on c'hartier,  
Peguen caer e bezan honest, peguen cri bezan muntret.

Helenan a zo bet ganet gant tud fur, tud a fesson,  
Gant pere a deus bet disquet c'heuil ma e religion,  
Ag e seblant a deus c'heuillet eus ar furnes ar guir hent,  
Quen e bet aruet var dro eis no bloas var'n ugent.

Deus mil eis cant tri a tregont cò a gonter e c'hrimo,  
En ty ar person eus a Guern hanvet an Otro'n Drogo;  
Eno e c'hanvez, emezi, eur plac'h fal a dinatur,  
Pehini disq dezi hadan dre ol an displijadur.

Ar plac'h-man, emez Helenan, voa carguet a gassoni,  
Ag a discas fonnus dezi an art da ampoesoni;  
Mæs ze zo eur gaou infernal laret gant ar Jegado,  
Pehini galomnie c'hoas diou heur aroc e maro.

Otro Le Cam Mær eus a Guern deu da rentan testeni  
Dre eur liser prudant a fur, ma zo bet biscoas hini,  
Penos an hini c'haccuses, ampoesoneres michant,  
A zo bet dre ol fur, honest, ag en peb lec'h inossant.

Penos a teus bet ar gourac'h, ampoesoneres treitour!  
Bars da vomejo divezan da dromplan da govesour?  
A te jonge gallont tromplan lagad an Otro Doue,  
De behini, var ar chafod, prest goude voa da ine?

Nan, da revelationo, Helena, nint quaet guirion!  
Mæs ze na ne quet estonus. Pa c'helles scuil ar poeson,  
A c'helles couls scuil ar guevier, ar parjur, ar galomni,  
Evit labein eur plac'h fur ous pini spoa cassoni.

Mæs recitomp an torfejo pere zo disoloet,  
A commansomp dre barous Guern, evel ma zo lavaret,  
Seis zo marvet er presbitor, er poanio ar c'hruellan,  
Eus a bere e doa Anna, eur c'hoar bropr da Helenan.

Dont a ra da ramplas e c'hoar er presbitor en Bubry,  
O! pebes anquen dar Person! taer maro zo en e dy;  
C'hoar ar Person ag e nizes, eur vouereb da Helenan,  
A zo bet prest ampoesonet, dec maro a zo breman.

Helena deu da Lomine da dy Jannet ar Boucher,  
Pehini zo quemeneres, evit disqui ar vicher:  
Mæs Jannet, e merc'h, e mam guez a zo prest ampoesonet:  
Pipi ar Boucher e hunan a so bet casi marvet.

Pipi o velet peguen pront e c'harue ar maro  
Gant ar re a vije soignet gant Helena Jegado,  
Zo bet ispiret gant Doue d'e chasceal eus e dy,  
A da refus quemer netra vige preparet ganti.

Goude-ze he bet recevet en ty intanves Lorc'y,  
Prest homan a zo bet marvet er poanio ar muian cri,  
Itron Toursaint n'eus ar maleur, an anquen ag ar glac'har  
Da dont de recev goude-ze, eus e zud a varo pevar.

En couant an Tad-Eternel, er guer demeus a Aldre,  
Eo bet neun rentet Helena neubet amzer goude-ze:  
Mæs chasset eo a c'hane evel eur plac'h disordren,  
Rac commancet a voa dija da ampoesoni'r souben.

Anna ar C'horvec eus Aldre, e c'hemer en e jervich,  
Allas ar plac'h na deus quet c'hoas sclabeet e c'hol valis!  
Anna a varo en daou devez, er poanio ar grevassan,  
Dre ar poeson roet dezi gant e mates Helenan,

Anna ar Fur eus Plumeret neuze guemer Helenan.  
Ebars en ty-ze e tisquez eur fe demeus ar brassan,  
Mæs ar vestres zo chomet clan, a dre bonneur eviti,  
Helena c'hente soudardet, ag a gouita dens e zy.

An Itron Hetel e c'hemer, a prest goude he maro,  
Neuze e teu da Bontivy da dy'n Otro Jouanno,  
E vab Emil, e esperans, eus a barzec bloas oaget,  
Gant ar plac'h cri a dinatur a zo prest ampoesonet.

Helena deu da Hennebont e neur gouitaad Pontivy,  
Ag a zo gajet da vates en ty'n Otro Keraly,  
Fonnus heman a zo maroet, ag an Itron a Veron  
Pehini e c'hemer goude, a varo dre ar poeson.

En meurs unan a daou ugent eo bet deut d'an Oriant,  
Da dy ar priejo Dupuy, ag eno ar plac'h michant,  
A guemer cas ous o huguel yaouanque a penneres  
Bars fin mis mae eo bet lazet gant an ampoesoneres.

Dont a ra d'ar guer a Yeuet, da dy Godie Mogero  
Pehini zo marc'hadoures, mæs dre e laeroncio  
Helenan a zo chassee, ag en cals a die al  
Pellec'h e jervijas goude voe cavet laer, disleal.

En eis cant eis a daou ugent eò deut d'ar guer a Raon,  
Ag eno deus bet jervijet en eis ty tad a fesson;  
Mæs dre ol e he bet cavet vicius ag anvius,  
A dre ol ive d'eus haded e zorfejo spouronus.

En ty an Itron Joubioux ag an Itron Bavalon,  
En ty Ironeset Carrière a Charlet eus a Raon,  
En ty ar priejo Rabot, ar priejo Ozanna,  
A zo prouet laeroncio cometet gant Helena.

Divar goust an Otro Roussel a deus bet ive laeret,  
Divar goust mates breur heman deus groet ar memes torfet,  
Intanves Roussel, o mam guez, ma na ne quet decedet,  
A die tragarecaad Doue, rac bet voa ampoesonet.

Itron Rabot gant Helena zo casi ampoesonet,  
Ivez e mam, Itron Brière, a zo bet casi maroet,  
A vremen c'hoas na nint quet couit demeus an ol soufranso  
Pere deus renquet anduri dre boeson ar Jegado.

Perotta Macé, eur plac'h fur, yaouanc a leun a yec'het,  
Er memes ty gant Helenan assembles n'eus jervijet;  
A monstr ifam ag execrabl a deu de c'hampoisoni,  
Dre ma crede voa Perotta guelloc'h deut da dud an ty.

En ty ar professor Bidard, pellec'h voa quignineres,  
Eo bet ampoesonet ar boëd gant an assassineres;  
Ol dud an ty a neus santet an effet eus ar poeson  
Pehini voa haded deze hep sujet ag hep ræson.

Rosa Tessier en ty Bidard a voa plac'h a confians;  
Quement-ze a voa re dija, ag a verite vinjans;  
Prest Helena dre ar poeson deu da destruj e yec'het,  
Ag er poanio ar muian rust ar plac'h-man a zo marvet.

Fanchon Huriaux goude-ze neus bet ramplacet Rosa,  
Mæs prest dezi a zo roet eur poeson gant Helena,  
Fanchon spontet deu dagoutaad; gant e zud eo bet soignet,  
Ag a deus bet ar boneur bras da had cavet e yec'het.

O Doue bras, just a guirion, pellec'h man da guruno,  
Pa nint quet c'hoas deut da guezan var Helena Jegado,  
Delacaad en poult, en ludu, de c'has demeus ar bed-man,  
A da arreti torfejo a ra d'ar galon semplan?

O! mæs gortozomp eur momet! Doue a zo paciant!  
Abred pe divezad, bet sur, en gavo an dud michant,  
Pa vezo carguet ar musur, daoulagad e brovidans  
A disoloio ar c'hrimo pere a c'houlen vinjans.

Ar momet-ze zo aruet, a poent bras voa cavet fin,  
Da dy Bidard e c'he bet deut Rosalia Sarrasin,  
An de quantan a vis guere homan a zo bet marvet  
Dre ar poeson roet dezi gant Helena miliguet.

Heman eo bet an divezan demeus e c'hol torfejo,  
Ar Veudencinet zo galvet da gonstati ar maro.  
Ol assembles deus discleriet voa marvet gant ar poeson,  
Helena doe'htu aretet, zo conduet d'ar prison.

Mil eis sant unan c'hauter cant, an de quantan a guere,  
Eo bet aretet Helena; neubet amzer goude-ze  
Eo deut an dud en ty pere a defoa bet jervijet  
Da gontan ar maleurio bras en o zie aruet.

En mis querzu eo bet galvet Helena d'an tribunal,  
Dirac ar jury assamblet dad juj an dud criminal,  
Pevar test a pevar ugent zo deut d'ar guer a Raon,  
Ar recit pehini reont deu da spouron ar galon.

Ari dirac ar barnerien, Helena neus disguelet,  
Peguement voa cri a galon, a peguement caledet;  
Gant ar brassan efrontiri e teu da nac'h e c'hrimo,  
A da essaad tremen vit faus ar lavar eus an testo.

Mæs ar barnerien indignet, ag ol en eur santimant,  
Goude bezan neun intentet, a bronons o jugamant,  
Ar c'hrimo voa prouet re sclæer, ag an testo re guirion,  
Vit gallout dont da bardoni eun evelep ampoeson.

Condaonet eo bet d'ar maro en mis querzu divezan,  
A nanequetsur hepraeson. Marguellomp contomp breman.  
Ped dre boeson an eies cri dislonquet gant an ifern,  
A neus recevet ar maro, da gontan deus parous Guern.

Seis a daou ugent a guevomp decedet dre ar poeson;  
Adalec ty ar person en Guern, betec ar guer a Raon,  
Mæs cals demeus a grimo al nint quet bet disoloet,  
Helenan aroc e maro neus quement-ze discleriet.

« Guir e'r c'hrimo, me Helenan, a bere hon accuset,  
» Mæs bezan zo cals a re al ag a zo chomet cuset:  
» Ar pez a ra er momet-man din-me ar brassan soufrans,  
» Eo daou grouadur neve-so coezet didan ma vinjans. »

En mil eis cant daou c'hauter cant, an ugent a vis c'hoëvrer  
E ze bet aruet an urs demeus a beurs ar barner,  
Da executi ar setans pehini voa prononcet,  
Ag an de var lerc'h ar mitin e ze bet executet.

Helena discuez eur glac'har ar brassan eus e c'hrimo,  
Goulen ra pardon ous an ol, o scuil eur mor a daëro;  
Siouas n'eller quet assuri defoa eur glac'har guirion,  
Pa deue da scuil ar galomni goude e c'hovision.

An Otro Doue neus gallout a misericord imans,  
Marteze neus bet pardonet d'an ide-ze a vinjans.  
Pa he dibennet Helenan, a dibennet gant justis,  
Vit ar repos eus e c'hine laromp eun *De Profundis*.

Ar Guerz-man a zo composet divar ar broceduren,  
Ag a neus vit aquet patant da rei d'an ol da gompren  
Penos pa lezer er galon dont da divan cassoni,  
Teuer prest da vezan capabl a grimo ar muian cri.

Ol homp breudeur a c'houerezet a beurs an Otro Doue!  
Gouvecomp eta pardoni gant joa an eil d'eguile.  
Mar teu on breur da vancout dimphastomp prest en pardoni  
Pe tivano en on c'halon ar vinjans, ar gassoni.

Heuillomp gourc'hemenno Doue, ar re on mam an Iis,  
Groëomp d'an ol vel ma carfempa ve groet dimp gant justis,  
Na lezomp na vis, nag envi da divan en on c'halon,  
A bezomp soign da c'heuil dre ol reglen on religion.

Propriété de l'Auteur. P. R.